

An den koz hag an evnig

Na dec'h d'an noz diwean,
Ha pa oe koaniet d'in,
Ha me o vont 'n em jardin,
— Ie tralira tralalik tralira,
Ha me o vont 'n em jardin
En aviz pourmeni.

Ha me o vont 'n em jardin,
En aviz pourmena.
Ha me klevet eun evnig,
War eur bod o kanan.

Hag o vonet an evnig
Hag o c'houlen ouzin :
— Pe te 'zo klanv a galon
Pe te t'eus poan-spered ?

Nan on ket klanv a galon,
Mes am eus poan-spered,
Na gant keun d'am yaouankiz
He deus ma c'houtaet.

Larez te d'in, 'evn bihan,
Te t'eus plu, dioueskel,
Na mont a rez evidon
Eur veachig a-bell ?

Da gerc'hat ma yaouankiz
Hag a zo et a droad ;
Ha pa vi arru aman,
Ni 'evo boutailhad.

— Tav d'in gant da yaouankiz
Na pa 'z eo et 'n he roud,
Gant holl vadou ar bed-man
N'on ket 'vit he c'havout.

— Ya, mes kent deus ma c'houiteet,
Dismegans 'deus d'in gret ;
Tortet he deus ma diouskoa,
Ma baro deus grizet.

Ma dent dimeus ma geno,
Ma fenn dizoloet,
Ha ma holl ajilite,
Holl ganti ez int et.

Me am eus bet eun amzer
Oan soubl 'vel korreen,
E tansen war ar gorden,
Hep bean krog en den.

E tansen war ar gorden,
Hep bean krog en mad ;
Eun troad d'in a zo rampet,
Hag ec'h on kouet a-blad.

Eun troad d'in a zo rampet,
Allaz ! hag ec'h on kouet,
Ha, herve ma levezet,
Zevel nan hallin ket.

